

07 Ar gorventenn

Poziou: Valentine Colleter

Ton hengounel

Gavotenn Ton simpl

$\bullet = 168$

Me ho ped 'ta Bre - to - ned da zo - net d'am se - laou

Me gomz eus ar gor - ven - tenn zo pa - seet 'barzh ar vro.

Me ho ped 'ta Bretoned da zonet d' am selaou
Me 'gomz deus ar gorventenn zo paseet 'barzh ar vro.

'Barzh ar bloavezh mil nav c'hant seizh ha pevar-ugent
D'ar c'hwezek a viz Here pa oa hanternoz sonet

Na me oa bet dihunet, ya sur, dre un taol spont
Gant an avel dirollet en koler o yudal

Ne greden ket kaozeal na kennebeut boujal
Ha gouloù oa ket en ti 'vit 'n em sklêrijennañ

E-pad teir eur orolaj sur e oa bet padet
Ar gorventenn maleürus, ar prenestroù a grene

Na pa oa deut ar mintin, neuze oan sortiet
Ha pa sellomp en-dro deomp hon c'halon zo mantret

Ha gant ar postoù bihan e teu ar c'helaouioù
Partout en bro Breiz-Izel a zo traoù distrujet

'R batimañchoù barzh ar porzhioù-mor kalz ane' zo torret
Kar taolet ha distaolet an eil eus egile

Na kalz deus an toennoù savet gant an avel
Ha tourioù an ilizoù kalz a zo diskaret

Ar c'hejer diwar ar beg a zo kas't da nijal
Ar c'hleier na vrallont ket d'ar Sul d'an ofer'nn bred

Partout ivez war an heñchoù a zo gwez diskaret
'Benn sirkuliñ a vo ret dont d' o debarasañ

Ambitus

